

JUSTIZ EVIT SEZNEC



Son ha ton savet gant François STÉPHAN Eostik Kreisker
deuz Kastel Paol.

A la memoire de Madame SEZNEC et de sa fill.

*En hommage d'admiration pour l'écrivain distingué
E. Delahaye, défenseur de Sez nec, directeur de "La Province"*

*A la gloire du magistrat intègre Ch. V. Herve
présérant l'abandon d'une brillante carrière à l'asservi-
sément de sa conscience.* F. S.

1

Breman ez euz eiz vloaz e Lez-Varn Veur Kemper
E oe barnet Sez nec tamallet 'giz muntret
D'ar galiou da viken ez eo bet koundaonet
Met du-hont e Kayen eo laouen e spered.

2

Laouen eo o sonjal e teuio dizale
War hent-hou Breiz-Izel, adarre, da vale
An holl a oar breman Sez nec a zo divlamm
Hag goulenn a reer holl terri eul lezen-gann

3

Sez nec ha Quéménéur, a ioa daon vignoun braz
Met eun deiz Quéménéur, allas ! na zistroaz
War Sez nec, evit gwit, e savaz an tabud
Hag muntret hep digoll, oe kountet gant an dud.

4

Doue hor banno holl, ha Sez nec er prizoun
A lavare bepred oa dinet h e galoun
Livaret a re, e goustianz seder
« Ya zamall a rit hol ! » « When tou ! n'oun ket
Imuntret ! »

5

Testou o doa gwelet Quéménéur, dre ar vro
Warlerc'h ma oe kountet, gant ar Justiz, maro
Ar re ioa bet galvet, n'oant ket bet Kredet
Re-all 'doa her gwelet, n'oant ket bet galvet.

6

Goulskoude e Traou Nez, e parrez Plourivo
E maner Quéménéur, en eun nosvez garo
E oe trouz ha tennou, redadeg ha safar
Quéménéur, marteze, a gouezas. Piou a oar ?

7

Testou ? martoloded hag a oa diskennet
Hed ar ster gant o bag, hag o devoa gwelet
Eun den o tec'hed trumm, hag war e lerc'h daou-all
Eun tenn sech da genta ha goudeze eun-all.

8

Pa oe Sez nec e beac'h merdeidi Plourivo
A ieaz da gounta o gwel, holl war eun dro
D'an arher, d'ar Barner, ha distro en o zi
O c'houstianz e peoc'h e velchont dizourzi

9

Sionaz ! o zesteni a gostez oe lezet
Hag e Traou Nez morse enklask na oe savet
Sez nec oe, el Lez Varn barnet e herr-amzer
Hep dat d'ar Gouarnes-oe kaset ar Merzer.

10

Epad ma oa du-hont, en ifern ar c'hrissa
E c'hreg paour, eur santez, a glask na petra-ta
Ardiget offer savetei he Enor
War an douar heptan ? Red eo mervel kentoc'h !

11

Met ni holl, Bretoned mignoned d'ar Justiz
C'hell goulenn diganti ma sello mad ha piz
Ouz an testi niou oe kinniget d'ezi
Eur seut tra ne c'helle nemet he enori.

12

Eur barner kalonek hag eur skrivagner braz
A red dre Vreiz-Izel hag zoken pelloc'h c'hoaz
Evit diskouez d'an holl en o bodadegou
Penaoz c'hell ar Justiz n'em drompla awechou

13

D'eomp gant tizianz d'no heul, hag goulennomp
Ma vo ar Justiz cün, ha koret en hor Bro d'hon tro
« Vit Sez nec, e diegez, hag ar Justiz gwirion
Savomp-oll hor mouez ! War zao, tud a galon !! »

(Reproduction interdite).